

# Ar Groagiou manket



1  
Na pa dolan ma speret pevar c'horn a breisisel  
Na velan nimet glahar a tourmant an deiz varlechar brezel  
Boulverso a chikanna in pevar c'horn deus ar vro  
Gant prisonnierien deus on bro in kever o groagiou.

2  
Nak ar pes a so pen kos o deus muioc'h a goler  
Na demeus o groagiou a seo ar viser  
O deus bet en Allemagn ia pa voanch prisonnier  
Ar groagiou in liberte a so manket do dever.

3  
Kolet o deus a respet ag ar fidelité  
Ivit ar priet er viser e bars in wirrionne  
Disonjet deus ar morale e voa dezo lavaret  
Gant maire dous o farejous an deiz me voant eureujet

4  
Ordrenet e voa deso o ia heuil ar priet  
Mes allas dant Allemagn e voa impossup monet  
Mar dijet bet ar pouar da heuil ar priejou  
Na voa ket bet in breisisel keimen a chikannou.

5  
Nini noa ket ners a oualch da gombatti an natur  
A so kouezet in dismegans ag in displujadur  
Na neo ket pevar mis e kin e doa da gombatti  
Breman a so pevar bloaves e voach e nem separi.

6  
Ar groagiou bars er ger o heuil o fantazi  
O tatempredi ar bed a deus nem soulaji  
A dre nerz an natur ar priet ankouezet  
A goude da skuil daelou pa zeo gret ar pehet.

7  
Setu ase eur sujet demeus ar glahariou  
Betek monet dant tribunal ia dirag ar jujou  
Monet dirag ar justis ia evit prozezi  
Ive da houlen divors ivit e nem separi.

8  
Setu ase eur glahar a goal blannedennou  
Petra a raio ar justis demeus ar priejou  
Nimet lakad etreso ar garante parfet  
Rak defotou ar bresel reink beza efasstet.

9  
Mes keren ar prisonnier na ma so var an neur  
O houeza an fan er stop o hober o maleur  
Surtout a re binvidik na ma so tut lohus  
Kever ar groaget manket serten ma so fachus

10  
Gouskoude ar prisonnier mar vije in liberte  
A nije gret uzach ar bed e bars in wirrionne  
Me gret ar botret faro a so boulverset o fen  
O klevet an nirboudou ia demeus heren.

11  
Neur ober tro ar vro a meus bet remerket  
Neur sellet dous begou ar gouez a vije eur brank sehet  
Lod o deus kals a vrancar sech na pa ve remerket  
Ar sota tud so var an douar eo ar botret a merhet.

12  
Drese eta ar hontrol deuet din c'honsoli  
A lakad ar priejou ia da nem unanni  
Kar pa deont da partaja ia o bugaligou  
Vezo guclet ar priejou o daou o skuil daelou

13  
Ar vugale ar c'hossa o deus muioc'h a skian  
Da zoussat fulor o zad seon a du gant o mam  
Karout a reont ar vam se pihini a neus o gnannet  
Gant lez deus poul i c'halon pisini o deus o maget.

14  
Kuitat breudeur a houareset houariet assambles  
O tonnet da nem wuitad o deus tristidiges  
Pa veon en noad a skian ivit e nem frekanti  
Impossup dant tad dar vamp donnet do separi.

15  
Dre se eta ar vugale na veson ket separet  
Dous o za nag o mammou breudeur na houareset  
Naturel a seo deso ia karet an neso  
Dre se a vank an nunion etre ar priejou

16  
Drese deuet eta breman ia da nem unanni  
Rak defotou ar bresel a reinker da rapari  
na po ket muich a viser o vaga o pugale  
Ivit e poa en Allemagn kollet o liberte.

17  
Anveout e ran groaget pere a so manket  
Deuskeuet fidelite in kever o priet  
O ia var o dienes ag e neur skuil daelou  
Presanchou dan n'Allemagn da souten an neso.

18  
Mes allas ar groaget iaouank nan na ouiont netra  
Na lakat liou var ar paper kerneubeut beaba  
Rak lavaret a meus hoas deus a beurs an natur  
Ar pes no peus ket gret huirrio var hoas hui raio sur.

19  
Ar lisirou a vije skrivet gant kanfardet iaouank.  
No deus ket bet a gelen deus o zad nag o mam  
Dever an tad ag ar vam ebars in wirrionne  
Rok monnet nemeus o si kelen o bugale.

20  
Goude ma de sonjet ma vesont deus ar furra.  
O fever eo o kelen a gredan a gredan meumestra  
O sonjal bars e plassou e ma o dalimpred  
Neo ket pa ve koet ar har a seo donnet da sellet.

21  
Kar pa stoko ar veink ia demeus o boutou  
A reumors a gonsians deso a rebechou  
O ober avoltriach e kever ar groagiou  
A lakat difelkute etre ar priejou.

22  
Evrus eta an nini a neus speret passion  
A so pur a gonsians a seder a galon  
Me o ped da gavet trues deus ar goal plannedennou  
Digouezet gant ar bresel être ar priejou.

23  
An nini a neus gret chanson a zo kanner populaire  
E man chom bars in Kergloff ia pa ve bars er ger  
Ia meurs a hini hoas a neus bet komposet  
E hano Hervé Tilly in breisisel.

Hervé TILLY

Droits réservés.